

HARZ AL LAER

PE KANAOUEN VAR GEMENT NOTER HA BANKER LAER

a zo bet hag a vezo !!! (1)

Gouzout a rit ema ar vrud,
Guechall ha hirio, 'tousez ann dud :
Ve laeroun vraz er c'harossiou,
Ar re vihan, er prizouniou.

Prizouniet 've eur paour timad,
'Vit eur bara pe boutou koad,
Eul lur amann, eunn andoillenn,
Pe eur skouarnad roet da eunn den.

Mes, kaout renker kalzik amzer,
'Barz kraouia Banker pe Noter
'Balamour laeront enn ho zi,
Goad ar beorien 'zo o c'houezi.

Oc'h espern he goumanancho,
Eur mevel 'zo ugent vloaz zo ;
'vit m'en dije var he gozni,
Eunn tamm bara, pa c'houneo mui.

Aliez vije dilerou,
Toull he dok ha fall he vragou,
'vit m'en dije da fin ar bloa,
Eur c'hant lur bennak da blasa.

D'ann Noter en doa ho c'hasset.
« Va arc'hant, aotrou, a blasfet ? »
— « Va den mad, d'hoc'h me flasso,
« Pemp pe c'houec'h dre gant ho pezo !

Tox : *Kisiou neve Kemper, pe Kear Is.*

« Ouzpen mar kerit abenn bloaz,
« Kement all d'in digasset c'hoaz.
« Brema evit destum danvez
« N'hoc'h euz ken hent nemet hennez. »

Ann den joaüs euz he guitaat :
— « Bennoz Doue, va Aotrou mad ;
« P'eo guir hoc'h euz ar vadelez
« Da graet va gannidegez. »

Eur veac'h et er meaz ann den, paour,
Ann Noter a ruille ann gour,
Hag a lavar 'nn eur vousec'hoarzin :
— « Divar da goust, azenn, bo guin ! »

Dao ! dao ! adarre var ann or,
Eur vatezik 'zo c'houl digor.
— « Aotrou Noter, d'in-me laret
« Ha ma c'houmanant a blasfet ? »

— « Va merc'hik keaz, ia, gant joa,
« Me raic evit ar guella.
« Kountet hoc'h arc'hant, plac'hik koant,
« D'hec'h-hu me raio c'houec'h dre gant. »

Hanter kant skoed he deuz laket,
Dirak ann Noter azezet :
— « Bep bloaz brema, va merc'hik fur,
« D'in digaset gant plijadur !

(1) Aman, ne gomzer nemet euz ar Bankerien, Noterien hag al laeroun vraz all, a zo bet re anezho er vro, sionaz ! Ar re a zo honest n'ho deuz ket ezom d'en em gemner, rak va zon a zo evit al laeroun hepken.

Perak ne ra ket hon Deputeed ha Senatourien repu. ganed lezennou da viret euz ar seurt laerounsiou-ze ? Guelloc'h a ve ober ann dra-ze, evit klask koll ar re hon, ober brezel d'ar veleien ha da gement a vev en guir gristen.
M. Q.

« Hanter kant skoed, 'me ann Noter,
« Evit guir 'zo eur zom dister ;
« N'ezuz fors, pa zeu kalz evelze,
« Va bern velann a gresk bemde. »

Mont a ra neuze d'ar gegin,
Mouse'hoarz eur iudaz var he vin :
— « Keginerez, grit frikou mad ;
« Skuiz ounn hirio o labourat. »

Trouz tud a glever tont en ti,
Ann Noter zeu d'ho zaludi :
— « Gaë a gavann ho taoulagad
« Petra a glaskit va zud vad ? »

— « D'eomp-ni zo roet bep a vil skoed,
« D'argoulou pa omp demezet ;
« Holl ho digasomp d'hoc'h d'ho ti,
« Da c'hortoz kaouet eur vereuri.

— « Daou zen iaouank, mad tre a rit,
« Em zi arc'hant, arc'hant c'hounit ;
« 'leac'h ho derc'hel gan-e-hoc'h er ger,
« 'pije ket 'vit-ho eun diner. »

Enn eur wea he voustachou :
— « Bemde vella gan-in ann traou ;
« Pa zeu d'in arc'hant leiz va zi,
« Me ia brema da zimezi. »

E-giz na oa gullet biskoaz,
Ann Noter, 'ra he aotrou braz,
Ha pakout 'ra eunn dimezel
Da zigas gant-han d'he gastel.

Mevelien ha plac'hed a gambr
A roer d'ann introun iaouank ;
Karossiou kaer dont da bourmen,
Braoïgou aour var he c'hroc'hen.

Ann dud pinvidik drellate,
O vele ruill ann Noter-ze :
— « Kasomp 'ta d'ezhan hon arc'hant,
« Hag he raio d'comp pemp dre gant. »

Setu int o vonet d'he di,
Gant arc'hant louet enu arbilli.
— « Paour keaz Aotrou, ni zo nec'het,
« Hon holl arc'hant zo' louedet !

— « Aotrounez hag introunezed,
« Perak beza 'velze nec'het ?
« Me blaso d'hoc'h hoc'h arc'hant guen,
« Ho pillejou bank, hoc'h aour melen. »

Taoliou ann Noter a blege,
Dindan pouez ann holl arc'hant-se,
Hag enn he benn he zaoulagad
Verve ho lakaat dre renkat.

— « Michans, evit va dic'haoui,
« Va zud, rafec'h eur gefridi
« Ma vezinn mear, enn ho parrez,
« Plas ann ozac'h Iann pe Jacques ! »

Neuze, c'hoaz, ann dud diskiant,
Goude kass d'ezhan ho arc'hant :
— « D'hoc'h ann enor, nann da zen all,
« Mear ha konseiller jeneral ! »

— « C'houi deuo ama da leina,
« Aotrounez, ben dizul kenta. »
— « Mad, Aotrou 'nn Noter, ni zeuio
« Da c'hedal neuze, kenavo ! »

Ti ann Noter a oa kall reuz,
D'ober pemzek pe c'houezek menz,
Gant kement all a seurtou guin,
Hag a bep seurt liquerriou fin.

Ar vondianed, pinvidik braz,
Eur seurt tinel 'doa bet biskoaz,
Ha gaë kena e lavarent
D'ann Noter ober he listenn.

— « Aotrounez ar penvidika,
« A dlefe kaout ar renk kenta,
« Rak-se 'roann da bep hini,
« Hervez ann arc'hant 'deuz em zi. »

D'ar zul varlerc'h 'vit he frikou,
Hen a bake ann holl voueziou,
Ha c'hoaz a vo 'benn ar veach-all
Ive konseiller jeneral.

Dougen 'ra hano eur c'hristen,
Kassoni ouz ar veleien,
Ha koulzkoude 'z a d'ann iliz ;
Ia, evit ober ar giz.

O velet eur seurt ruill enn ti,
Arc'hant ann holl a zeue di :
Re ar minor, ann intanvez,
Re ar mevel hag ar vatez.

Paet a vije ive bep tro,
D'ann dud mad, ho interesto ;
Ha met d'ezho banneou var briz,
Lein d'ar pinvidik, d'ar bour'hiz.

Ann holl lavar, eo eunn den mad :
— « Paca a ra eur verennad,
« Ha koazeal ouzomp ken flour ;
« Prest bepred atao d'hor zikour ! »

Fors da zispign arc'hant re-all
He stalik a iez da fall ;
He-unan 'vele ann dra-ze
Ha muioc'h-mui a zispigne.

— « Debromp frikou, greomp bombans !
« Mad tre e ia ann traou e Frans.
« Michans ive hep dale pell,
« Me 'zavo er c'hargou huel ! »

Eunn devez 'velaz 'tont d'he di,
Eur vatez 'vont da zimezi :
— « Me, Noter, a zo dek vloaz zo,
« 'tigass d'hoc'h ma c'houmanancho.

« Hirio ez ounn deut d'ho c'herc'hat,
« Evit dimezi d'eur paotr mad
« A zo bet pemp ploaz e soudard,
« Evelze n'euz ket eul liard. »

— « Evit hoc'h arc'hant na po ket,
« Ann interest 'po mar veret.
« Ne dal ket d'hoc'h eze lenve
« Perak kemer tud gant netra ? »

Tamm ha tammik neuze ar vrud
Gommanse redek 'touez ann dud :
— « Ouz ann Noter zo da ziouall,
« Ni glev e ra afferiou fall ! »

Tud da fermi eur vereuri
Erru antronoz enn he di,
Hag a c'houlenn ouz ann Noter
Ho arc'hant da heul ho lizer.

— « Digaset n'oa d'hoc'h anezho,
« Da c'hortoz ezomm diout-ho,
« Evit prena kezek ha saout.
« Hirio 'velit renkomp ho c'haout.

— « Me am euz plasset hoc'h arc'hant,
« Po goulennit 'm'euz nec'hamant,
« Prestit ouz hoc'h amezien ;
« C'hoaz a c'hounezot guenneien. »

Ann dud klevet ar respount-se
Zelle ann eil euz egile.
Skriva 'rejont d'ann tribunal,
Mes, eno ver pell o c'hedal.

Eunn devez 'teuz eunn Aotrou,
Var he fri braz eul lunedou :
— « Aotrou Noter, va dek mil skoëd
« Dizale a renkinn kaouet.

« Reï a rann d'hoc'h eiz de termen,
« 'vit ho reï d'in enn aour melen. »
Eiz de, pemzete tremenet
Nak aour, na paper n'erru ket.

En dro z'a da gaout ann Noter :
— « Aotrou, tremenet ann amzer.
— « Petra fell d'c-hoc'h, va Aotrou mad,
« Dao a vo gedal eur pennad.

— « Pe gaign, Noter, ne gav ket d'id,
« Emaint pell zo aoualc'h ganid ?
« Uzet am euz tri re voutou
« O tonet d'ho goulenn, Aotrou !

Ann Aotrou, gant kalz a dud all,
A ra he glem d'ann tribunal.
Ar varnerien, enn eur grena,
Gass archerien da di hema.

Ann archerien geiz a ouele,
Enn ho brageier a ree.
Pa renkent stleja euz he di
Ann Noter dirak ho mistri.

El lesvarn pa oa erruet,
Digant-ban zo bet goulennet :
— « Perak, Noter, baet ket ann dud ?
« Laer oc'h dioc'h a glever ar vrud.

— « M'ho tesko mar kerit, barner,
« In gomz 'velze ouzin Noter !
« Petra, diot, ne ouzez ket
« Ar renkou braz 'zalc'hann er bed ?

— « Trugarez d'hoc'h, Aotrou Noter,
« Ann holl var-n-hoc'h gri : Harz al laer !
« Evel-ze me ia d'ho kraouia
« Ha tud d'ho ti evit furcha. »

Ann Noter a reaz he glemm
A enep ann hol varnerien,
Ha ma vije zoken kredet,
Da varner a vije hanvet.

Epad eunn nebeudik misiou,
'zo bet furche ti ann Aotrou,
Ha gret ann neuz, giz d'ar re-all,
D'ho gass dirak ann tribunal.

Hen zibabe he varnerien
Hervez al liou mad a zougen ;
He alvokad euz he goste,
Glaské bepret ar re zalle.

Laeronsiou braz veler n'euz gret,
Da vale renko be losket,
Rak n'heller ket, e koustians,
Prizounia ar seurt-se e Frans !

Ma vige bet c'hoaz eur glaguer
Pe eur c'hoz tammik pillauer ;
Me Noterien ha Bankerien,
Michans 'vint ket prizounerien !

Tinik ar mevel a lare :
« Dleje be laet ann holl dud-se,
« Krouget goude var ar blassenn,
« Pep kear euz ann huéla guen !

« Dig set eno tro-var-dro
« Bankerien, Noterien ar vro,
« 'vit ma lezfent gant pep hini
« Arc'hant gounezet o c'houezi !

Nak a bed den veler, siouaz !
Daoubleget var ho fennik baz,

O klask ho boed a ger-da-ger,
Ha n'ez ken kaoz 'met ann Noter.

Gouezomp petra 'z'eomp da ober,
'raok 'mont ti Banker pe Noter,
Enn eur zellet euz tud hor bro,
Var ar plouz, kalz laket gant-ho.

Bep mare laromp : Harz al laer !
Pa vimp vont da di eunn Noter. (1)
Panefe 've re-hirr va zon,
Hanvchent parresiou al laeroun.

Euz eunn tu-all c'hoaz marteze,
Dlefent diouall ouz ann dud-se !
Na vent va-unan prizouniet
'balamour d'ar zon m'euz savet.

Me ve eaz tre va frizounia,
Evit danvez n'am euz netra,
Nemet 'baoue tri bloaz o klemm,
Eunn tad pemp ploaz pevar-ugent.

Ma venn-me laket er prizoun,
Va zad a varfe gant ann naoun ;
Rak-se gavan guell chomm er meaz :
Kenavezo d'hoc'h, tudou keaz !

Mikael DUFINEC

(1) Guelet ar pezh am euz lavaret huelloc'h.

(Tous droits réservés)

